




EMGLEV YA D'AR BREZHONEG EVIT DIORREN PADUS AR BREZHONEG



OFIS PUBLIK
AR BREZHONEG
OFFICE PUBLIC
DE LA LANGUE BRETONNE





Ofis Publik ar Brezhoneg

Un diazezadur publik eo Ofis Publik ar Brezhoneg, ennañ ar Stad, Kuzulioù-rannvro Breizh ha Broioù-al-Liger ha Kuzulioù-departamant Penn-ar-Bed, ar Mor-Bihan, Aodoù-an-Arvor, Il-ha-Gwilen hag al Liger-Atlantel.

Staliet eo an Ofis Publik war 5 departamant Breizh istorel e Karaez, Roazhon, Naoned, Gwened ha Gwengamp.

Daou bol zo ennañ. An hini kentañ, ar “Pol Yezh”, a zo ennañ servijoù ar Glad yezhel ha panellerezh, Treiñ-Aliañ, ar greizenn dermenadurezh TermBret ha servij Yezh ha Neveziñ Niverel. En eil pol, ar “Pol Studi ha Diorren”, emañ Arsella implij ar yezhoù hag Ajañs diorren an Ofis Publik. Gant an daou bol-se e vez kemeret e karg an tachennoù ma vez brudet ha kaset ar yezh war-raok. Gouest int da respont da c’houlennoù a bep seurt (enklaskoù war stad ar brezhoneg, enklaskoù war an anvioù-lec’h, enklaskoù war an termennoù, treiñ, kuzulioù evit kinnig ar panellerezh, adlenn...).

Mont 'a ra Ofis Publik ar Brezhoneg en-dro gant skoazell :




Ya d'ar brezhoneg

Ar c'houlzad Ya d'ar brezhoneg a oa bet roet lañs dezhañ e 2001 da-geñver bloavezh ar yezhoù en Europa. Soñjet eo ar c'houlzad evit holl obererien ar vuhez sokial hag armerzhel, evit broudañ anezho da zivizout ober traoù fetis evit ma teufe ar brezhoneg da vezañ implijet en o mont en-dro pemdeziek.

D'ar 5 a viz Here 2001, pa oa bet digoret ar c'houlzad, e oa 177 framm hag o doa sinet. Bremañ ez eus ouzhpenn 700 siner. Ur skeudenn eus ar gevredigezh vreizhat en he fezh eo ar frammoù-se ha diskouez a reont pegen liesseurt eo-hi. E-touez ar sinerien e kaver embregerezhioù, stalioù, kevredigezhioù, sindikadoù, kluboù sport, mediaoù ha frammoù all c'hoazh...

Gwelet a reer splann war ar grafik pegen emouestlet eo bed an armerzh er c'houlzad pa'z a d'ober muioc'h eget 56,94% eus ar sinerien. Ar re o deus bet sinet Ya d'ar brezhoneg o deus kaset kalz traoù fetis da benn : stummadur micherel, panellerezh, bruderezh, plaketennoù kelaouiñ...

Dasparzh ar sinerien dre c'hennad



Salle de réunion
Sal-emvod

Rakdiviz

Erruet eo ar brezhoneg en ^{vet}xxi kantved met renket emañ e-touez ar yezhoù en arvar bras e *Levr Ruz ar Yezhoù en Arvar* bet embannet gant an Unesco. Hervez an aozadur-se ez eo ouzhpenn mil yezh, a-douez ar pevar mil bennak a vez komzet hiziv an deiz, a vo aet da get a-benn ugent vloaz.

Gant an Emglev Ya d'ar brezhoneg e fell deomp prouiñ, du war wenn, pegen mennet eo hor c'hevredigezh da lakaat ar brezhoneg da vevañ ha d'ober ar pezh zo ret evit ma tiorro en trede milved, ar pezh n'eo ket asur hiziv an deiz. Setu perak ez omp mennet da lakaat disoc'hañ, en un nebeud dekvloaziadoù, un argerzh a c'hallfe padout pell-kenañ gant al lusk a vremañ pe chom hep dont da wir biken marteze.

War empleg ar gevredigezh en he fezh emañ diazezet an argerzh-se. War bedenn Ofis Publik ar Brezhoneg, ni, obererien kedvuhez Breizh, a fell deomp reiñ an tu d'ar brezhoneg da ziorren en un doare padus hag aesaat e implij naturel ha reizh er gevredigezh.

Goude sinañ an Emglev-mañ ha dre un argerzh digor ha liesdoare, e roomp hor ger da lakaat an diarbennoù ret e pleustr evit adsevel ar brezhoneg.

Krefen an emglev Ya d'ar brezhoneg

Ni, obererien ar gedvuhez:

a ro da c'houzout e roomp hor ger da gemer perzh en un argerzh a zisoc'ho war adsavidigezh ar brezhoneg evit ma tizho hor yezh he live diorren uhelañ.

a embann e vo renet an argerzh-se gant ur Steuñv terkañ yezhel a vo kaset da benn:

- en ur zielefennañ stad ar yezh dre c'hennad ha dre dakad bro;
- en ur dermeniñ an diarbennoù terkañ da vezañ kemeret da bep live;
- en ul lakaat e pleustr engouestloù fetis ha mennedik obererien ar gedvuhez o kemer perzh en e savidigezh;

hon eus c'hoant, dre al lusk engouestl hag emglev-mañ, da lakaat splann youl hor c'hevredigezh da greñvaat ar brezhoneg.

Digor eo an Emglev Ya d'ar Brezhoneg, evel an argerzh engouestl a zeu diwarnañ, da holl obererien ar gedvuhez.

An tu a zle reiñ d'hor c'hevredigezh da ziskouez pegen mennet eo, a-drugarez d'ar perzh kemeret gant an holl nerzhioù sokial a ya d'he ober.

Ni hon eus c'hoant ma vo lakaet diarvar dazont ar brezhoneg e Breizh a-bezh en ^{xxi^{vet}} kantved gant an Emglev Ya d'ar Brezhoneg.

Oberoù dibabet

6	Kit panellerezh an OPAB
7	Panellerezh ar framm (sinadur postel)
9	Logo
10	Lec'hienn Internet
32	«Breizh» war kein ar c'hrez

Sinañ an emglev Ya d'ar brezhoneg 01

Anv Kevre breizhat sportoù gouezeleg - Brittany GAA

Chomlec'h 123 Straed Marzhin ar Strobinner, 35000 Roazhon

a c'houlenn sinañ an emglev Ya d'ar brezhoneg 01

hag a ro e c'her kas da benn an oberoù dibabet gantañ zo amañ da-heul :

6	7	9	10	32
---	---	---	----	----

a-benn : 2 vloaz

Graet e Pereg

D'ar Sadorn 18 a viz Meurzh daou vil tri warn-ugent



Aotrou Prezidant
Mathieu RIVOALLAN

OFIS PUBLIK
AR BREZHONEG



OFFICE PUBLIC
DE LA LANGUE
BRETONNE

Aotrou Prezidant
Paul MOLAC